



Gwerz Itroun-Varia

AR RELEK



War don : AR ROUE GRALLON A KER IS

Gwezall, en amzer dremenet,
Breiz-Izell oa gourc'hemenet,
Gant ur Roue fur ha zantel,
He e oa he hano Judikel.

Judikel he oa ur Roue,
Hag he garie meurbed Doue,
Doue garie en he galon
Judikel mab hena Gralon.

Judikel he oa un den reiz,
Reizoc'h n'he oa hini e Breiz,
Reizoc'h evit han n'he oa ket,
E Breiz nag he neb lec'h abet.

Sant Judikel he oa un den,
Anavezet e peb tachen,
'Vit beza un den azoare
E tal an holl e peb mare.

Kichen dor he di ar beorien,
Hag inn stankoc'h evit merrien
En ur zastume adrazur,
'Vit goulenn digant-han mezur.

'Vel-se dremene he vue,
Ho kemer deus an holl true,
Hag un Doue deus an henvou
E divoale ha bep kanvou.

Judikel e d'oa ur c'hender,
He oa he hano Konober,
Hag he-man oa kont e Gwened
Uur ger azo brudet meurbet.

Kenober he oa un den fall,
Evel t-han n'he oa ket un all,
N'he oa ket un all evel t-han
E neb lec'h var an douar-màn.

Hogen konob e d'oa ur c'hoar,
Ur plac'h chentil a koant c'houi oar,
Hag hou-man he d'oa 'vit pried
Kram mab Roue ar Gallaoued.

Hano tad Kram he oa Kloter,
Ur Roue c'hoas neubeud seder
Rak atao vije ho sonjall,
Penos ober 'vit kreski Gall.

Kram e nos kenkouls hag e de,
Digant he dad he c'houlenne,
Ur vro benag da c'houarni
A da veza ar mistr en hi.

Hogen he dad n'he c'houle ket
Rei d'he vab Kram neb bro abet,
A Kram en han droug un devez
D'he dad he lavaras eb mez :

Va zad, va zad, dec'h me lavar
Un deiz d'ha zont c'houi p'ho glac'har,
Me lako an tan en ho pro,
Hag ho kalon dir ha dorro.

Mont heran pell dirag ho tremm,
Hogen c'houi v'ho klevet ho klemm,
Klevet ho klemm un deiz da zont,
Kenavezo tad divergont.

Kram war-ze 'n'ur laka en hent,
Heuillet deus mallos e gerent,
Tec'hel hera evel ur laer
Da Wenet da gaout he vreur-kaer.

E Gwened pa z'eo 'n'ur gavet
D'e vreur-kaer e deus lavaret,
Greomp doc'h-tu brezell d'amm zad,
Hastomp primm e lakad ha blad.

Greomp ive d'ha Judikel,
Hirio eb kavet aoun brezell,
Rak an eil kouls hac eguile,
Kœzout war an douar ha gle.

Hastomp prim war nezhe trec'hi,
'Vit ma vomp sioul 'n'hor minic'hi,
Ur wech ma vont ho daou maro,
Peb hini vo sioul en he vro.

An daou brenik war-ze rak-tal
Eb chom pelloc'h d'ha varc'hatal,
Ar brezell ho deus diraoued,
Eneb Breiz hag ar Gallaoued.

Neuze Judikel ha Kloter,
Zavas tud eneb Konober,
Ha dre hor bro ar stravillou,
Rede evel ar c'hurunou.

E Breiz-Izell en amzer-ze,
Oa digor ginou meur ha ve,
Ginou meur ha ve oa digor,
Prest d'hor lounka evel ar mor.

Dre holl ha rede ar maro,
En he zorn deou he falz garo,
Evit falc'ha dre mar gelle
Kement ha vele ho vale.

Konober koulz ha Kram ha goll,
Ho zoudardet zo e diroll,
Ne ouzont ken pelec'h tec'hell
Tec'hell araog tan ar brezell.

Bale ha rejont evel kent,
Ha gant-he holl skrignet ho dent,
Kent en ur gavjont e Plounaour,
Va zilaouit kenvroiz paour :

E Plounaour pa zinn 'n'ur gavet,
En eur lec'h zo Relek anvet,
Ho deus lavaret en ur vouez,
Aman evez an divez.

Aman vo divez hor bue,
Ha nikun n'enn devo true,
True nikun n'he gemero
Diouzimp goude hor maro.

Tud Kloter ha tud Judikel,
'Vit lakad divez d'ar brezell.
Azo ive en ur gavet
Hag inn adrazur kounaret.

Kloter d'he dud he lavaras :
Ha neb ha glask he gar he c'hlas,
Ha Judikel laras ive :
Trec'homp pe diskenomp er be.

Kloter ha me zo n'ur glevet
Nikun n'he vezo espernet,
N'he vezo espernet nikun,
Hars war nezhe 'vel ar gurun.

Araog diraoui an argad,
Leun ha lenvou he zaoulagad,
Judikel ha bedas Doue,
Hor gwir dad hag hor gwir Roue.

Ha greiz va c'halon ho pedan,
Va zad hirio d'amm skoazellàn,
Ha d'ha lakad ho nerz emm brec'h,
Ma vô ar gwir war ar gaou trec'h !

Pann d'oa Judikel divezet
He bedenn, e dens lavaret ;
D'he zoudardet red eo trec'hi,
Arog distrei d'hor minic'hi.

Neuze an argad ha ziraou,
An henv zo du evel ar glaou,
Dre holl he n'emm stok an houarn,
Peb hini stouv he ziou skouarn.

Ar jeot, ar bleun, ar mein, ar c'hoad.
Holl ezinn ruziet gant ar goad,
Judikel sko gant Konober,
Ha war e vab he zail Kloter.

Ar goaregou zo bruzunet,
Ar goafou azo skiltrennet,
Ar c'hlezier zo ha dammou,
Lenvit holl tadou ha mammou.

War an dachen zo leun ha dud,
Rheiou vraz ha rheiou munud,
Darn zo gwallet, darn all maro,
Ar brezell zo siouaz garo.

Ha greiz ma oa ar stourm ho ren,
Stourm hag he skorn he oad e den,
Ar Werc'hes zo 'n'ur diskwellet,
An oll he deveus hi gwelet.

Doc'h-tu d'an daou c'hlin Judikel,
He c'haz dirak hor mamm zantel,
Evit he fedd d'ha lakad
Divez d'ur stourm ken griziad.

Werc'hes patrounes Breiz-Izell,
Lakit da dec'hell ar brezell,
Ha digassit demp an amzer,
Ma gan ar labous ken seder.

Neuze zav divar he zaou e'hlinn,
Hag e galon muioc'h lirzin,
Rak-tal he lavar d'he Vroiz,
Aman vô savet un Ilis.

Un Iliz aman vô savet
Prestig d'ar Wec'hez beniget,
Hag aman e disheol ar groaz,
Vô gret ur pardoun kaer bep bloaz.

Kement hini azo e poan
Ho devo gwalc'hadur ann oan,
Ha deus an henvou rr Werc'hes,
War n'he skuillo he madeles.

Deus a bevar c'horn Breiz-Izell,
Pa vezo divez d'ar vrezell,
Zeuis an dud da bardonna
Aman, ti merc'h Zantes Anna.

Rak-se t-ha stournomp holl va zud,
Ha marvomp holl bras ha munud,
Evit fourgassi deus hor bro
Ur vrezell-zo kement c'hwero.

Arstourm'ha c'hwibangoasoc'h c'hoas
Liou ar goad ho deus meur ha voas,
Meur ha varc'heg azo ha blad,
'Vit ann holl pebeus kalonad.

Pa oa ar stourm leun ha gounar,
Ho tiskar an dud d'an douar,
Dre an hoabl luc'het ha redas,
Hag ar c'hurunou he strakas.

An henvou zo dic'hadennet,
Ar gœn azo disc'hriennet,
Hag ar zoudardet eb didu
Ha red peb hini deus he du.

War he gein he man Konober,
Diskaret ezeo gant Kloter,
War an dachen eo astennet
Ar C'hont Konober ha Wenet.

Kram dec'h ive dirag he dad,
Ken ru ha tan he zaou lagad,
Tec'hell kera n'he oar pelec'h,
Hag he galon karget ha nec'h.

Beteg Kervorgan he dec'has,
Hag er lec'h-se he n'emm guzas,
He n'emm guzas e hag he dud
Eb ober an distera brud.

Kram hag he dud eb trouz abet,
E Kervorgan zo n'em guzet,
Azo n'em guzet 'vit gortoz
Ma dremenje ur ar malloz.

Greg Kram siouaz melkoniet,
Liez he lavar d'he fried,
Me gred, me gret, va fried-me
Evezo Kermorgan hor be,

Dister Kram ezeo hor lojeiz,
Teval ha ien ezeo hon neiz,
Me gred n'en deus ket er bed-man,
Un all ken dister evel t-an.

Koulscoude oc'h mab d'ur Roue,
Hogen ma vô gred ioul Doue,
Rak Doue ezeo an hini
Hor gourdrouz arog hor barni.

E pelec'h heman hor c'hestel
Diskaret inn gant Judikel,
Ha va breur paour azo maro,
Treujet gant ur c'hlez e garo.

E ty teval ar glaouer-man,
Chomfomp d'ha vervel ha gredan,
Rak e droulanz heman ho tad
Hag he vefomp lazet marvad.

Tavid va greg n'he lenvit ket,
Gant va zad vefomp pardounet,
Va zad me sonj ha gemero
Truez ouzimp hag hor gwalc'ho.

Tavit Hena ne lenvit ken,
Divez azo d'ha bep anken,
Me gred he mefomp plijadur
Un deiz da zonet adrazur.

Gant va zad n'himp vezo gwalc'het,
Pe ha rog ma vefomp kavet,
Zafomp hor pevar d'ha guzet
Elec'h va zad n'hor c'havo ket.

Mar gallan tizout va lestrik,
Hor pevar eb lavaret grik,
N'himp ha iello pell da guzad.
Ia, pell deus ha zroulanz va zad.

Me lako ar mor e trezomp,
Hac evruzoc'h en ur gavfomp,
D'ha c'hortoz ar peoc'h d'ha zonet
D'an Hiberni rinkfomp monet.

Kram he galon leun ha c'hlac'har,
Evel-se gomze deus he bar,
Deus he bar p'hini ha garie.
Hag he lake he galon ie.

Epad ma lavare Kram-ze,
D'he bried ker, ho bugale,
Oa ho c'hoari en ho c'hichen
Eb goud petra zeo an anken.

Kram glaske penos frealzi,
He vreg he d'he voa ambloari,
E keit ma ouient war ar leur-zi
Ho bugale drant ho c'hoari.

Ha greiz ma ouient gant ho c'hoariou
Ho dabu evit fourgass ar riou,
'Vel trouz ar gurun he glevjont,
Hag ho c'hargas rak-tal ha spont.

Ar lochen kerkent ha grenas,
Hag an hor frank he zigoras,
Ha doc'h-tu he tigoue Kloter,
He galon karget ha gouner.

Rak-tal ma zeo en ur gavet,
Kloter e deveus lavaret,

Saillit va zud prim war nezhe
Stagit tad, mamm ha bugale.

N'he zilaouit ket ho c'hlemmou,
N'he sellit ket deus ho lenvou,
Stardit anezhe eb true,
Ma vezo divez d'ho bue.

Evit-he d'ha huanadi,
D'ha glemm skiltr ha d'ha hirvoudi,
Stardit anezhe goasoc'h-voaz
Saillit eb aoun war ho zreid noaz.

Va fardounit hirio va zad,
Hag un deiz he poc'h ho mennad,
Poc'h ho mennad digant Doue,
Hor gwir mistr hag hor gwir Roue.

Kloter n'he rha neb van abet,
Ha doc'h-tu ma zint liammet.
A tan war n'he en deus laket
Eb kaout an distera morc'hed.

Kerkent an tan redas skrijuz
E dro d'an dud-man goaluruz,
An tan eb aoun neuze ha red
Evel en henvou an dared.

Kram, he vreg hag ho daou bugel
Azo devet war ho skabel,
War ho skabel ezint devet
An tan e deus ho fuluc'het.

Ho c'horvou azo e ludu,
Ar reier tro war dro zo du,
Du zint tro war dro ar reier
N'he lavaran ket ha c'hevier,

E Kervorgan zo ur men-hir,
N'he lavaran na gaou, na guir,
Ur men-hir zo e Kervorgan
N'he lavaran na ia, na nan.

Hag he kredan ezo savet,
Savet er lec'h ma ouient devet,
Gant Kloter arog mont e hent
Goude maro kri he gerent.

Kram hag he dud azo maro,
Maro e kreiz un tan garo,
Marve zin, hogen an histor
En he askre zalc'h ho hevor.

Pevarzeck kant vloaz zo aboe
Ma zeo tremenet kemen-se,
Ha koulsgoude c'hoas en gomzer
Aliez deus Kram ha Kloter.

Pa oa ar brezell tremenet,
Judikel e deus lavaret,
E deus lavaret un devez
D'an dud chentil oa en he lez :

Va zud mar plich va zilaouet,
Bras ha bian mar em c'heret,
Hag e klefoc'h e ber amzer
Petra he meus c'hoant da ober.

C'hoant em beuz he vefe savet,
Er lec'h azo Relec anvet,
Un Iliz d'ar Werc'h Vari,
Vit zeui netra d'hor glac'hari,

Rak-se klaskit oberourien,
Tud ha bep stad, devechourien,
Ha kid deus va feurs da zével
Un Ilis d'ar Werc'hes zantel.

Doc'h-tu war lavar ar Roue,
Tud he iaz en hano Doue,
Buhan d'ar Relek da zével
Un ti nevez d'hor mam zantel.

Un Iliz kaer azo savet
Savet d'ar Werc'hes biniget,
D'an daou c'hlinn dirag ar Werc'hes,
Ann holl he c'ha gant karantes.

Eskibien, Dôl, Leon, Kemper,
Roazon, Noanet ha Landreger,
Malo, Gewned ha Sant-Briek,
Ho deus biniget ar Relek.

Ar Releg ho deus biniget,
Beteg ann ur ma zint marvet,
Hag hirio he binig ha greiz
Ho c'halon, c'hoas Eskibien Breiz.

Sant Bernard ha sant Beneat,
Daou zen pere oa deread,
Tud d'ar Releg ho deus kaset,
Hag ur leandi zo savet.

Savet ho deus ur leandi,
Vit kana gand mui ha zudi,
Kanouennou kaer en honor,
Itroun-Varia an Arvor.

Da viz Eost evit ar bemzek,
Eti ar Werc'hes er Relek,
Er Relek ha ve gret bep bloaz
En ne honor ur pardoun braz.

E devez-se deus ha Blounaour,
Kroachou arc'hant ha kroachou aour,
Ha baniellou gwen glaz ha ru,
A zeu di gant tud ha bep tu.

An oferenn ha ve kanet,
Ar gousperou ve lavaret,
Hag e dro d'ar stankou glever
Meuli hano mam hor zalver.

Deus ha bevar c'horn Breiz-Izell,
Ha dost kenkouls evel ha bell,
E tigasser tud mac'hagnet
D'ar Relek, da glask ar iec'het.

Hag ar Werc'hes e de, an nos,
He skwill war nezhe he benos,
Ha kouls ha Gwerc'hes Remengol,
He vir deus Breiz d'ha vont d'ha gol.

Deus he leandi en henvou,
Ar Werc'hes ha zec'h hor lenvou,
Hag ha bella lestr ar sturier,
E peb mare deus ar reier.

War ar bed e pad ma vefomp,
Ia, Gwerc'hes ar Releg pedomp,
Ia, pedomp Gwerc'hes ar Relek,
Vel he fede sant Galonnek.

Pepomp ive he mab Jesus,
Hagun Doue Holl-Galloudus,
Da bellad an Droug-speredjou,
Ha d'ho sklapa en isfonjou.

Pedomp c'hoas ar Spered-Santel,
D'hor c'huzad indann he vantel,
Beteg ma zeuio an dougnes
D'ha lakad d'hor bue dives.

Ar maro eb kavet true.
He lam diganemp hor bue,
Hag hon ine zav d'an henvou,
Pe ha zisken en Ifernou!

VISANT COAT.

(Propriété).

Montroulez, imp. P. LANOË.